



Miz Even 2008

Evaluation de breton
Niveau B1

Lenn ha skrivañ

Anv :

Kevredigezh :

SPERED AR VRO

Henri Goardon. Nerzh an avel

7 park tourioù avel nevez a vo savet e Breizh a-benn nebeut. Reoù all a zo war ar renk. E Goulien e tro brav an tourioù-se abaoe pell.

Lavarout a ra eo laouen ha kontant. Klevet e vez eo fier ivez Ao. Maer Goulien ! An hini kentañ e Breizh e oa bet o tegemer tourioù avel war zouarou e barrez e miz Meurzh 2000, nepell eus beg ar Raz ha beg ar Van.

2.000 pe 3.000 tiegezh

« Anavezet mat eo parrez Goulien bremañ ! Un energiezh prop eo. Un dra vat eo evit ar moneiz, da gentañ. Degas a ra deomp 28 milion a lurioù bep bloaz. Evit an douristed eo un dra vat ivez. Eus pell e teuont da welet an tourioù avel. Ha "Ti an Avel" a zo bet savet ar bloaz-mañ da ziskouez d'an dud petra eo an avel, petra a ra war al laboused, an aod hag ar bleunioù. Digor e vez da vare ar vakañsoù hag implijet 'zo bet ur plac'h evit ober war-dro ».

Eizh tour avel a vez o treiñ e Goulien. Feurmet e vez ar parkeier gant Cegelec ha Neg Micon, ur stal a vro Danmark, an hini kentañ war ar marc'had-se er bed a-bezh. Gwerzhet e vez an tredan da EDF. Peadra da bourchas ha tommañ 2000 pe 3000 tiegezh.



● Henri Goardon e Ti an Avel. Digoret eo bet an ti-se e miz gouere. (Foto Michèle Le Moal)

Gevier war an tourioù avel

Laouen eo hiziv Ao. maer Goulien, met ne gompren ket abalamour da betra n'eo ket bet heuliet buanoc'h war an hent-se gant tud all. 6 park tourioù avel a gontar e Breizh lzel hiziv. Ouzhpenn 10 raktres all a zo bet savet. Bewech eo ret gortoz pell an aotre gant ar veles-tradurezh. Ha brezel ha reuz a vez atav gant an dud o chom tro-war-dro, amezeien an tourioù avel

nevez. « Pezh a zo trist eo ma vefe kontet gevier war an tourioù avel. An trouz ? An tourioù avel a-vremañ ne droont ket ken buan. An trouz ne zirenk den ebet. 300 metr pelloc'h emañ an tiez kentañ. Muioc'h a drouz a vez klevet gant an otoioù war an hent. Parabolennou a zo bet paeet d'an holl dud a oa direnket o Tele gant an tourioù avel. 150 tiegezh a oa. Tud eus Goulien hag eus parrezioù all ivez ».

Cheñch a reont

Ma n'eo ket gwall domm an dud atav, sichantoc'h n'eo ket ar veles-tradurezh. Strishoc'h eo al lezenn abaoe miz Gouere 2003. Ret eo bremañ ober un enklask publik bewech ma vez kaoz produiñ ouzhpenn 2,5 megawatt. E Bro Wened e vez nac'het gant ar prefet pep raktres en ur barrez war vord ar mor... « N'emaomp ket pell eus beg ar Raz e Goulien. Meur a hini en deus bet aon ma vefe difesonet ar vro. N'eo ket gwir ! E-lec'h int bet lakaet ne oa ket gwall vrav al lec'h. An tourioù avel a zo atav fas d'an avel. Cheñch a reont, gant an amzer, an heol, hag an avel... ». Tourioù kaer hervez Henri Goardon. « N'eus netra da guzhat d'an dud amañ. Deuit da welet penaos int ! »

Lionel Buannic



Bremaik 19/11/2007



Peseurt divizoù eus *Grenelle an Endro* a vo lakaet e pleustr, penaos ha pegoulz ?

Goude Grenelle an Endro ez eus bet klevet war an holl vediaoù pennañ e vefe kalz cheñchamantoù gant an divizoù a oa bet kemeret : harzet e vo da broduiñ OGK, un tailh a ranko bezañ paeet gant ar c'hirri-samm, ha ne vo ket savet hentoù-tizh nevez ken.

Evit an OGK : un disklêriadenn a zo bet graet gant Sarkozy, o lavaret e vefe harzet an OGK ha ne oant ket "OGK an dazont", met n'eus bet resisaet deiziad ebet, hentenn ebet evit diforc'hañ an OGK "fall" diouzh re an dazont, ha dreist-holl n'eus ket bet lavaret peseurt labour a ranko bezañ graet gant J.L. Borloo evit ma vefe kaset an diviz da benn.

Evit ar c'hirri-samm : gwir eo e vo un tailh warno, met adalek 2010 hepken, ha pa vint o ruilhal war an hentoù bihan hepken, ket war an hentoù-tizh (a zo koulskoude an darn vrasañ eus an hentoù ma vezont kavet). Kement-mañ n'eo ket bet lavaret er mediaoù pennañ.

Evit an hentoù-tizh, ne vo ket savet reoù nevez, nemet en degouezhioù-mañ : surentez, re a girri war un hent, pe un dedenn lec'hel. Met dindan ar gerioù "dedenn lec'hel" e c'heller lakaat ur bern traoù, setu moarvat e vo asantet da raktresoù nevez, evel da skouer hini ar raktres Langon-Pau a zo bet asantet gant Dominique Bussereau.

M.M.

Emañ ar pennad-mañ o tont eus un dielfennadenn glokoc'h a c'heller kavout war lec'hienn nevez @rrêt sur images.


OGK : Organoù o genoù kemmet (OGM)



Livioù iskis a c'heller gwelet en oabl gwechoù zo pa vez skoet an ozon gant skinoù heol.

Petra nevez gant ar gwiskad ozon ?

Abaoe pell n'hon eus ket klevet komz eus an toull er gwiskad ozon. Un nebeud gwechoù hon eus bet klevet ez ae war zisteraat, ha netra ken bremañ, ken ma c'heller krediñ n'eus ket outañ ken. Koulskoude ez eus nevezenti war an danvez.



An toull er gwiskad ozon d'ar brasañ m'eo bet e 2000, a-us da Antarktika.

Da gentañ, displegomp un tammig petra eo. Gant gwiskad ozon ar stratosferenn (etre 10-30 km ha 30-50 km a-us deomp) e vez gwarezet ar boudoù bev diouzh skinoù fallañ an Heol. Heptañ ne vefe buhez ebet. Abalamour da zanvezioù zo (CFC hag HCFC), a veze implijet er yenereziou da skouer, e vez taget ar gwiskad-mañ. E poloù an Douar e steuz ar gwiskad ozon da vareoù zo eus ar bloaz : sed aze an « toull ». Un eil gwiskad a sav ivez, izeloc'h, en droposferenn (dindan 10 km a-us deomp) pa vez re saotret ar c'hêriou, met hennezh ne warez ket ac'hanomp tamm ebet, ha gwashoc'h c'hoazh, fall evit ar yec'hed eo analat ozon.

EMGLEV 1987

Ugent vloaz eo, e miz Gwengolo 1987, e oa bet aozet ur c'hendalc'h war an danvez e Montréal gant 191 bro. Ar pal a oa herzel tamm-ha-tamm ouzh ar produiñ gazoù evel ar CFC hag HCFC evit ma c'hellfe ar gwiskad ozon tevaat en-dro. Evit ur wech, er c'hontrol da genemglev Kyoto, eo bet doujet ar c'henemglev-mañ gant an holl broioù emezelet, hag efedus eo bet ar strivoù. E 2030 e ranko an holl broioù greantel paouez penn-da-benn d'ober gant ar gazoù-mañ, hag e 2040 emañ ar bloaziad evit ar broioù hep greanterezh. Ouzhpenn-se ez eus bet kavet gant skiantourien e oa ivez un efed-gor gant ar gazoù a zistruje an ozon, setu e vefe bet gwashoc'h c'hoazh tommadur an hin ma ne vefe

ket bet harzet d'ober gant ar gazoù-se. Ken gwir eo se ma voe kinniget, en emgav Montréal diwezhañ war an danvez, e miz Gwengolo, ma vefe harzet dek vloaz abretoc'h (da lâret eo 2020 ha 2030) d'ober gant ar gazoù-mañ, kement-mañ evit espern betek 3,5% a c'hazoù un efed-gor ganto.

GRAET BEPRED GANT AR GAZOÙ NOAZUS

Daoust da se e sav kudennoù : posupl eo ne vihanafe ket ken buan-se an toull er gwiskad ozon. Unan eus an abegoù eo ar yenereziou kozh a vez dalc'het e lec'hioù zo eus Afrika, e-lec'h ma ne vez ket distrujet ar gazoù noazus. Ouzhpenn da se e vefe gwerzhet e-maez lezenn, ha neuze hep bezañ disklêriet, betek ur c'hard eus produoù ar gazoù-mañ enno. Ha dre ma vez atav luziet an darvoudoù o tennañ d'an hin ez eo posupl e vefe levezonet an ozon gant elfennoù all n'haller ket c'hoari warno.

ADSAVET AR GWISKAD A-BENN 2065

Er bloaz-mañ e oa erruet abretoc'h an toull er gwiskad ozon, ar pezh a reas aon d'ar skiantourien. Koulskoude n'eo ket ken bras-se (e-tro 25 milion km²), un tammig nebeutoc'h eget warlene. Daoust da se, n'haller ket lavaret emañ o kregiñ da steuziañ. N'eo nemet e-tro 2065 e vo adkavet gantañ stad 1980.

Dour sklaer e Breizh ?

War wellaat ec'h a kalite an dour atao, tamm pe damm, hervez soñj ar Vretoned.

Un dek goulenn bennak zo bet graet ouzh 1200 a dud war ar pezh a sonjont diwar-benn kalite an dour da evañ pe implijet 'b'ar vro gant ur « sondaj » savet gant kuzul ar rannvro.

Meur a rummad tud zo bet goulennataet, diouzh o micherioù, o oad ha c'hoazh dre zepartamant.

Ur rentañ-kont sklaer zo bet graet barzh ar c'hazetennoù Ouest-France hag an Telegramme, gant sifroù e-leizh. Trawalc'h d'al lennerien da gavout respontoù d'o anken 'vit lod, pe da zivec'hañ o spered 'vit lod all.

Setu, memestra un nebeud sifroù :

51% deus an dud n'evont ket dour tuellenn ken ha 78% a ev dour boutailh bemdez !!

53% a soñj 'zo ur riskl bennak 'vit ar yec'hed gant dour an duellenn.

Piv zo kiriek da saotradur an dour ?

51% deus an dud goulennataet 'lâr eo, da gentañ, al labourerezh-douar. Met forzhig a dud 'soñj dezhe 'zo ul lodenn war chouk an uzinoù, pe c'hoazh dre an dour lousaet o teverañ deus pep ti (mekanikoù gwalc'hiñ, privezioù,...). Paotred ha merc'hed al liorzhoù 'vefe ivez gwalldroet da implij ar « pulve-dorn » war ar fleur, al legumaj, pe an aleoù. Un niver bras a Vretoned zo nec'het gant saotradur an dour , 66%, ar pezh a ra kalz !



51% deus an dud n'evont ket dour tuellenn ken.

Evel-just eo an nitrat hag al louzeier chimik a zo er renk gentañ. 22 % zo nec'het ivez gant kresk ar bezhin-glas war hon zraezhennoù 'ba bord ar mor.

'Vit ar mare n'eus den ebet a soñj dezhañ eo direbech dour ar stêrioù, koulz hag an dour dindan zouar (nappe phréatique) pe dour an eiennoù ! (0% !).

GERIOU DIAES

War wellaat : en amélioration, en progrès

Rannvro : région

Goulennata : interroger

Anken : angoisse

Dour-tuellenn : de l'eau du robinet

Kiriek : responsable

An diouer a zour : le manque d'eau

Puraat : purifier

Espern : épargner, économiser.

An enklask : l'enquête

Saotradur : pollution

Furnez : sagesse

Direbech : sans défauts

Kargañ godelloù : remplir les poches

Daoust hag emañ ar vro war an hent mat evit gwellaat an traoù ?

Fiziañs 'neus ar Vretoned 'barzh an dud e-karg, kumunioù, kantonioù, rannvro, 'vit mirout deus an traoù da vont war fallaat : 69% memestra !

Un dra mat-tre ivez : 85% deuzoutomp n'em gav kiriek deus kalite an dour ha deus ar saotradur, ar pezh a zo dispar ! Dispar da heul pa soñj an dud, dre 83%, eo ret kelenn ar skouer vat d'ar vugale. Daoust hag-eñ eo nec'het an dud gant an diouer a zour er bloavezhioù da zont ? n'int ket, rak 79% deusoute 'neus fiziañs e vo trawalc'h.

Met 66% a lâr eo ret cheñch hor mod d'ober gant an dour, 'vit puraat anezhañ hag evit e espern.

'Benn ar fin, dre an enklask-se e welomp emañ ar furnez oc'h ober he zamm hent 'ba pennoù kalet ar Vretoned.

'Vel 'lâr ar vedised : « bremañ eo anavezet mat ar c'hleñved ». Anavezet mat eo ivez ar mod da wellaat ar c'hlañv, da lâret eo an dour. Petra a chom d'ober 'vit ma vefe direbech dour hon zuellennoù en hon zier ? Ar respont zo 'ba spered pep Breton, 'ba kelenn mat ar gerent d'o bugale, 'ba kelenn ar vistriskol.

Ha da bep hini d'en em soñjal, bewech ma tremen dirak estajerennoù ar « magazennoù glas », leun chouk a louzeier a bep seurt, emaoamp o kargañ godelloù ar gapitalourien vras, keit m'emaomp-ni re difout deus dour ha douar hon bro.



Miz Even 2008

Pennad tennet eus Le Télégramme

Un tour avel	Une éolienne
A-benn nebeut	D'ici peu
Da vare ar vakañsoù	Au moment des vacances
Pourchas	Fournir
Abalamour da betra	Perak
Raktres	Projet
Ar velestradurezh	L'administration
Un enklask	Une enquête
Bewech ma vez kaoz	A chaque fois qu'il est question de ...
Difesonet	Enlaidi

Pennad tennet eus Bremaik

Diviz	Décision
Lakaat e pleustr	Mettre en pratique
Pennañ	Principal
OGK	Organisme génétiquement modifié
Hentenn	Méthode
Kas da benn	Mener à bien
An darn vrasañ	La majorité
An hentoù ma vezont kavet	Les routes où on les trouve
Un dedenn lec'hel	Une situation locale



Miz Even 2008

Pennad tennet eus Bremañ

Ar gwiskad	La couche
Mont war zisteraat	Aller en s'amenuisant
Gwareziñ	Protéger
Steuziañ	Disparaître
Da vareoù zo	A certaines périodes
Ur c'hendalc'h war an danvez	Un congrès sur le sujet
Kenemglev	Convention
Broioù emezelet	Pays adhérents
Greantel	Industriel
Ober gant	Utiliser
Efed-gor	Effet de serre
Tommadur an hin	Le réchauffement climatique
Daoust da se	Malgré cela
An darvoudoù o tennañ d'an hin	Les événements liés au climat
Levezonet	Influencé
Elfennoù	Éléments

Pennad tennet eus Ar Poher

'b'ar vro	E-barzh ar vro
'vit	Evit
Fiziañs 'neus ar Vretoned	Fiziañs o deus ar Vretoned
Deuzoutomp	Diouzhimp
Deusoute	Diouto
'vel	Evel



Miz Even 2008

Evaluation de breton Niveau B1

Pennad an Telegramme

Pet park tourioù-avel a oa e Breizh Izel pa oa bet skrivet ar pennad ?				
<input type="checkbox"/> 5	<input type="checkbox"/> 6	<input type="checkbox"/> 7	<input type="checkbox"/> 10	<input type="checkbox"/> Ouzhpenn 10
Ur plac'h zo bet implijet evit ober war-dro :				
<input type="checkbox"/> Al laboused, an aod hag ar bleunioù	<input type="checkbox"/> An tourioù-avel			
<input type="checkbox"/> Ti an Avel	<input type="checkbox"/> An douristed			
E Goulien e vez pourchaset trawalc'h a dredan gant an tourioù-avel evit :				
<input type="checkbox"/> 150 den	<input type="checkbox"/> etre 2000 ha 3000 den			
<input type="checkbox"/> Goulien hag ar parrezioù all	<input type="checkbox"/> etre 2000 ha 3000 familh			

Peseurt klemmoù a vez klevet diwar-benn an tourioù-avel ?



Miz Even 2008

Evaluation de breton Niveau B1

Pennad Bremaik

Paouezet e vo da broduiñ OGK :

- Penn da benn OGK ha n'int ket OGK an dazont OGK an dazont

Un tailh a vo war ar c'hirri-samm :

- pounneroc'h eget 2010 kg a vo war an hentoù tizh
 a vo war an hentoù bihan betek 2010

Ha savet e vo hentoù-tizh nevez ?

- Ya, evit ar c'hirri-samm Ya, pa vo re a girri war un hent, da skouer
 Ne vo ket graet ken Adalek 2010 hepken

Peseurt kudenn a chom gant ar produiñ OGK ?



Miz Even 2008

Evaluation de breton Niveau B1

Pennad Bremañ

Ar gwiskad ozon er stratosferenn

zo dañjerus evit ar yec'hed a warez ar boudoù bev n'en deus efed ebet

Ar gazoù CFC hag HCFC

a zegas un efed gor a warez ar gwiskad ozon a zistruj ar gwiskad ozon

E 2007, an toull er gwiskad ozon

a zo deuet abretoc'h eget boaz a zo brasoc'h eget boaz a zo steuziet

Petra a zistruj ar gwiskad ozon ?



Miz Even 2008

Evaluation de breton Niveau B1

Pennad Ar Poc'her

Gant piv eo bet graet ar sondaj ?

Ar Poc'her Ouest-France hag an Télégramme Ar c'huzul Rannvro

Peseurt dregantad* a dud a soñj dezho eo mat-kaer stad an dour dindan zouar ?

0 % 9 % 22 % 51 % 53 % 66 % 69 %

Ha nec'het eo an dud gant an diouer a zouar en amzer da zont ?

Ya N'int ket N'ouzer ket

*dregantad : pourcentage

Hervez ar sondaj, piv zo kiriek eus saotradur an dour ?